



Photo Mikaël AUDREN

Bleun-Brug


Kanomp, C'hoariomp, C'hoarzomp

Niv. 46

C'HOUEVRER 1952

PETROUCHKA

Son rusiat... Komzou brezonek gant M. G.



2.

Hag eur plac'h yaouank a oa
'Veze anvet Marousia.
A! A! Marousia,
Eur plac'h eus ar re goanta!

5.

Hag hi d'ober c'vitañ
Krampeuz gwiniñ tanava:
A! A! Petrouchka,
Pegen mat ne vint ket 'ta!

3.

Hag o vale neuze 'ta
'N em gavas gant Petrouchka:
— A! A! Daoust petra
A ve nevez, Marousia!

6.

Ne zeuas ket Petrouchka,
Den ne ouezas pe 'vit tra.
A! A! Marousia,
Pegen glac'haret e oa!

4.

Hag hi 'respontas outañ
— Warc'hoaz eo va gouel du-mañ
Deus 'ta, Petrouchka,
Fest a vo, ebad ha joa!

7.

He c'hendero, ar paotr Grichka,
Hennez ouezas o lonka:
A! A! Petrouchka,
Petra 'c'h eus graet aze 'ta?

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1952 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant gant ar miz-mañ. O fedi start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.

Koumanant a enor : 600 lur.

Kas an arc'hant da : V. SEITE, Bleun-Brug, Treboul (Finistère).
C.C.P. 544.22 Nantes, hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

Patronachou diwar ar mez, ha yaouankizou, evidoc'h eo hon eus moulet an niverenn-mañ. Niverennou a zalc'homp evidoc'h. O goulennit diganeomp.



133661

STAG E GROC'HEN OUZ E GEIN...

Stag e oa e groc'henn ouz e gein, ha stag mat... Ken stag ma ne oa ket aes kaout groc'henn stag startoc'h.

Ken piz e oa Yann m'en defe touzet eul laouen-dar. Pa zigoueze gantañ mont d'an iliz (ne oa ket eus an dud devota), pa dremene plad an Anaon dirak e fri, m'en defe kredet derc'hel gantañ ar pezh daou wennek (d'ar c'houlz-se e oa c'hoaz gwenneien, ha zoken gwenneien toull) ha lakaat an toull hepken er plad, sur oun'en defe graet hep krena. Tremenet en deus e vuhez o rastellat arc'hant ha dastumet en deus eur bernig mat.

N'eus forz pegen stag e oa e galon ouz madou an douar, Yann a voe ret d'ezañ mervel. Klafiv bras e kouezas eun dervez...

E vugale — tri mab en doa — a gemeras o amzer a-raok gervel ar medisin... Ken piz hag o zad e oant an eil hag egile.

Peurvuia, ar gerent piz ha skragh o devez bugale brokus ha fouet-e-dra. « Goude ar rastell e teu ar forc'h », evel ma lavar an dud. Met tri mab Yann a oa pep hini anezo mab e dad penn-kil-ha-troad. Rasteller eo Yann, rastellerien eo e vugale.

Fallaat ra Yann. Mil boan en deus bremañ o kaout e alan...

Achu eo gantañ... a ve lavaret. E dri mab a zo aze dirak a wele...

— Paourkêz tad, eme Jobig, ar yaouanka, en eur glemmuskat. Nag a boan en deus bet war an douar-mañ o tastum an tammig peadra a lez ganeomp. Ret e vo d'eomp ober gantañ eun interamant kaer. Eur wetur dre dan d'e gas d'an iliz ha d'ar wered!...

Eun arched dero gant kouevr warnañ...! Ha, diwezatac'h, eur bez eus ar re vrava!... O, pebez glac'har koll eun tad ken mat!...

— Ya, gwir a levez, eme Jobig, ar mab hanter-hena. Emañ kollet ganeomp hon tad ha n'eo ket an arc'hant a zispignimp o kas anezañ d'an douar eo a skubo ar glac'har diwar hor c'halon. Pa soñjan nag a vizer en deus bet o tastum eur gwenneig bennak! Eur pec'hed e vefe forani ar pezh a zo bet koustet ken ker d'hon tadig paour! N'eo ket eur wetur dre dan nag enn interamant kenta-klas eo roio ar yec'hed hag ar vuhez d'hon tad. Eur wetur dre gezeg a vo mat d'e gas d'an iliz! Eun arched koat gwenn a gousto ker a-walc'h dija hag eun interamant eil klas ivez! Perak ober diskempenn war an arc'hant en deus bet hon tad kement all a boan o c'hounit anezañ.

— Ar wirionez a zo ganez Jobig, eme ar mab hena.

Gwelloc'h egedoc'h, peogwir oun ar c'hosa, e ouzon pegement a boan hag a labour eo bet koustet d'hon tad an tammig leve a lez ganeomp. Arabat d'eomp 'ta forani madou koustet ken ker!

Dont a ra an interamanchou da veza eur rivin evit ar familhou...! N'eo ket a-walc'h d'eoc'h beza beuzet er glac'har, e ranker c'hoaz dont da denna diouz ho kodell ar gwenneig diweza. Hag an dud dre ourgouilh, a sav c'hoant ganto ober dalc'hmat kaeroc'h an eil eget egile. Ma n'eo ket eun druez!

Hon tad d'eomp-ni o oa gwelet mat gant an holl. Kavet e vezo tud, n'eus forz pegement, da zougenn e gorf betek ar wered. Ne vezo ezomm eus gwetur ebet, na dre-dan na dre-gezeg... Hag eun interamant trede klas a vo ker a-walc'h. Hon tad e-unan a lavarfe d'eomp ober kement-all, ma vefe possubl d'ezañ c'hoaz komz.

A-greiz pep kreiz setu ar c'hlañvour o tigeri e zaoulagad... hag e lavar:

— Mat a rit, va bugale, grit piz ha kempenn war an tamm peadra a lezan ganeoc'h... Aze, e traoñ an ti, ez eus eur c'hased-horolaj koz, mat a-walc'h eo hennez da ober eun arched d'in...

Na gemerit gwetur ebet... Na dre-dan... Na dre-gezeg... Me yelo war va zroad, va bugale... Ya, war va zroad... Hag e varvas war ar gomz-se.

Petromik.

NOUNOU HA CHANIG

Diviz etre koz ha yaouank diwarbenn Ykam ar merc'hed.

Nounou goz, koef glas, lunedou war he fri, azezet oc'h ober stamm.

Chanig, 17 vloaz, koueriaded a-zoare, e koef, ha mat gana.

Chanig (o tont etrezek Nounou en eur skuba hag en eur gana eur c'houlad eus eur zon nevez : (war don : « Barz an Arvor », pe eun all).

Ni fell d'eomp evidomp hon daou, Harpet an eil war egile,
Kaout eun tiegez d'en em garet, Gant ma talc'hô ar bed da drei
Ha ne vo biken diskaret, Kalon ha kalon ni a zay
N'eus forz pegen fall 'z ay an traou. Betek bloavez hor Jubile !


Nounou. — Ar Jubile ? gant egile ?
Egile 'ta, piou eo ?
Unan moan, unan teo ?

Chanig. — (Ehanet da skuba, en eur c'hoarzin) :
Daoust ha me oar ! Unanig koant !
Hag a vezo diouz va c'hoant !

Nounou. — Chê ! da seitek vloaz dijà
Chanig o sonjal e petra !
Alo ! lez da ranellerez !
Gra da labour genaouegez.

Chanig. — Va labour a ran mat atao
Ha kalz gwelloc'h pa ganan brao :
(— O skuba adarre e kan) :

Diskan



Oh ! nag a vad a joa gwirion, a leve - nez evit peb kalon gwelet war
zas e peb harrez dre nerz ar feiz, ar garan - tez Merched yaouank eus hor mêziou, staget heb
o - ber ar ve - ziou da labourat ken etre - zo var an da - chen merket d'e - zo evit gwe-
let e pe zoare hag e peb lec'h, e peb doare ec'h hadint feiz unvaniezh, ure vat ha laouene di gez

Nounou. — Asa ! pebez mouez kaer !... Biskoaz n'em eus nac'h et.
Eo dudius klevet plac'hed
O tistaga d'eomp kantikou
Ha soniou zoken awechiou.
Met lavar d'in, e p' lec'h out bet
O teski da ziskan ? Er patronach, n'eo ket ?...
Chê ! paotrezed, fur war o meno,
I oue rezura Iloz ep tuoa O


Chanig. — Da goll amzer, Nounou goz ?
Ni pa 'z eomp di da zul da noz
N'eo ket moarvat da ranellat.

Nounou. — D'ober ' tra ' ta ? da luskellat ?...
Pe da lakat war ho fri
Peintur ruz ha poudr' de riz ?

Chanig. — Da studial, da zeski leun a draou
Hag a zisplegfen d'eoc'h en eur gerig pe zaou.

Nounou. — Lavar 'ta, ma vo gwelet
Ha n'out ket sod pe berwelet.

Chanig. — (O kana en eur skuba) :



I... he glaskomp ket ober bur - tudou na chenchar bed gant eur faol bir
Met klask a ramp lakat hon tudou da vont a - raok ha nan war giz.

Klevet a rit ? Ni glask lakat tud hor mêziou
D'en em blijout en o ziegeziou,
Dreist holl oc'h heul gwelloc'h kenteliou sakr ar feiz
A zo bet a viskoaz kenta teñzor hor Breiz.

Nounou. — Hag a zo kaer !... hag a zo mat !
Hag a blijio d'az vamm ha d'az tad !

Chanig. — Ni glask hada dre 'n holl diez
Karantez hag unvaniezh,
O chom atao egiz m'eo dleet
Dirak an holl laouen bepred.

Nounou. — Hag a zo kaer ! hag a zo mat !
Hag a blijio d'az vamm ha d'az tad !...

Chanig. — Ni zo divizet holl ganeomp
Inkanti 'n dra-mañ dre ma 'z eomp :
Koueriaded hag artizaned
A dle chom atao uanet,
D'en em harpa, evel ma reer
War gement micher, ahont, e kêr !
En em glevet kenetrezo
Rak ezom 'zo hag a vezo —
Yaouank ha koz — evit gwella
Bevañs, lojeiz, labour ha stad.
Bremañ, e kement tiegez,
Ez a mat ar gounidegez
Dre ma weler eo Yann gouer a vag ar bed :
Penaoz n'her gwelfed ket ?
Ya, ganeomp emañ 'r voul o trei
Met kement-se, daoust ha padout a ray ?
Nann, adarre vezimp touzet

Ma chomomp en hon lok 'vel bugale vouzet.
 En em anaout, en em welet
 En em garet, en em glevet
 A zo 'n dever d'eomp holl,
 Tud yaouank ha tud koz :
 Anez e vezimp koll
 Hag ez aimp adarre d'ar foz...
 Ha n'eo ket gwir ?... Setu perag bremañ 'saver
 Rumajou yaouankiz e Breiz e pep karter.
 Me zo aet en unan... hag esperañs em eus
 N'em bezo ket a geuz !

Nounou. — Va Doue !... na pebez sermoun !
 Te zo trêc'h d'an aotrou persoun !

Chanig. — Me garfe 'walc'h... ni 'oar ivez, war ar mêziou,
 D'ar yaouankiz e vank plijadur awechou,
 D'ar baotred ha d'ar paotrezed, setu perak
 E savomp amañ 'g ahont, eur gouel eur wec'h bennak,
 Anez, kalz eus hor merc'hedou
 A zay adarre d'ar c'hêriou
 Da glask plijadurioù foll,
 Marteze, siouaz, d'en em goll !

Nounou. — Ah ! paotrez kêz !... te glask miret ouz strinkelled
 Troet holl e dimezellet
 Bleo en o dourn, kollet o c'hoef
 Sodet gant «silema» velo ha T.S.F.
 Da vont ahount da glask er c'hêriou
 Lakizien ha plijadurioù ?
 Gwelet e vo ! gwelet e vo !
 Chanig ! eur «bon point» e po,
 Ma talc'hez ar seurt-se da vont d'ar parkeier
 Fank ha teil ouz ho divesker !

Chanig. — Mat, Nounou, graet e vo ! graet e vo dizale

Nounou. — Oh ! met ar merc'hed-mañ ne d'int mui bugale !
 Asa ! Chanig ! piou n' dije kredet
 E oas-te ken distagellet !...

Kea d'ar patronach pa gari
 Da studial, da lenn ha da c'hoari ;
 N'eo ket Nounou 'viro !... na da vamm, na da dad !
 Ché ! na me garfe yaouankaat,
 Evit mont di ganez
 Pa ne vez ket a brez.
 Sell ! bremaik en eur ober stamm
 Ez in da gas eur boutegad kaol-poum d'az vamm.
 Ché ! kan eur wechig c'hoaz d'az Noun
 An diskan kaer eus da zoun.

Chanig. — O skuba, e kan penn da benn en eur bellât :
 « Oh ! nag a.vat, a joa gwirion, etc... »

Nounou. — O sevel hag o trei ous an dud, p'eo aet Chanig kuit :
 Set 'aze 'vat eur vrenniken !...
 N'em bije ket sonjet biken !

Paotr Treoure.

KORNANDONED SANT KADOU

Marvailh renket evit ar c'hoariva gant Y.-V. PERROT
 hag Herry CAOUISSIN diwar kontadenn Marianna ABGRALL

C'hoarierien : **CHEUN AN TAOUARC'H**, Leonad koz.
SANT PER, Porzier ar Baradoz.
DELWENN SANT KADOU.
AN ARC'HAEL MIKAEL.
AR GORNANDONED.

Taolenn genta

WAR DREUZOU AR BARADOZ

St Per a zo voredi dindan ar porched (en tu kleiz) azezet en eur gador
 vrec'h. War e varlenn, levr bras an eneou.

Klevet a raer ton ar c'hantik **ELEZ AR BARADOZ** c'hoariet gant an ograou
 pe an harmonium, pe c'hoaz eur piano.

Cheun, gwisket e giz Landivizio-Sizun (e chupenn sul a zo gantañ), a
 zigouez eus an tu dehou. — Sellout a ra ouz eur skritell alaouret a lenner
 warnañ : **BARADOZ**.

Cheun. — A, mat, emañ eta pelloc'h war hent ar baradoz !
 (Da sant Per) Aotrou Porzier, amañ emañ ar baradoz ?

St Per (a gendalc'h da voredi).

Cheun (krefñvoc'h). — Amañ emañ ti an Aotrou Doue ?... (**ST PER** ne res-
 pont ket).

Cheun. — Alato, ar paourkez den a zo kousket mik !
 (O youc'hal a bouez penn) : Aotrou, amañ emañ ar baradoz ?

St Per (O tihuni a greiz holl). — Asa, n'on ket bouzar. Perak e hopez ker
 krefñv ? Petra glaskez ?

Cheun. — Aotrou Sant Per benniget, me eo Cheun an Taouarc'h, eus parrez
 Sizun e Bro Léon. Deuet oun d'ar baradoz da c'houlenn eur c'hougnig !

St Per. — A, ya. Azez 'ta neuze, ha gwelomp ha gounezet az peus da varadoz ?

Cheun. — Feiz, aotrou Sant Per, eur c'hristen mat-oun bet edoug va buhez.
 Fabrik an Anaon epad ugent vloaz. Morse n'am eus manket d'an oferenn-bred
 na d'ar gousperou. Epad daou ugent vloaz em eus sonet an Anjelus e chapel
 Saint-Kadou, diouz ar mintin, da greizteiz, ha d'an abardaez...

(Cheun en deus lavaret ar c'homzou-se en eur redadenn, evel m'en dije
 graet e veuleudi d'ezañ e-unan.)

St Per. — Goustadig, goustadig va den mat. N'out ket deuet amañ evit en
 em veuli. Gwelet e vo bremaik, na petra 'ta, pe gwenn pe du emañ da ene. (O
 c'hervel) : **AOTROU MIKAEL !**

(Seni a ra eur c'hloc'hig.)

St Mikael a zegouez gant e valañsou.

Cheun a gouez d'an daoulin, hag a zav e zivrec'h war du sant Mikael :
 Aotrou Sant Mikael, balañser an Eneou
 Balañsit va ene en tu dehou.

(Gwelet a raer plad gwenn ar balañsou o tiskenn : goustadik. Ar mad graet
 gant Cheun a zo pounneroc'h eget an droug. Cheun a laosk eun huanadenn :
 A !!!

(*Dal ma vez aet d'an traoñ plad gwenn ar balañsou, e klevet eun taol sone-
rez (coup de gong).*)

St Per. — Chañs az peus, Cheun. Ar mad graet ganit edoug da vuhez a zo pounneroc'h eget an droug.

(*Sellet a ra ouz e levr*) :

E gwir, eur c'hristen mat hag eur Breizad penn-kil-ha-troad out bet adalek da gavell badeziant betek da gavell bez.

Cheun (*laouen*). — Mil bennoz Doue d'eoc'h Aotrou St Per, ha d'eoc'h c'houi ivez aotrou Sant Mikael benniget. Re a veuleudiou eo evidon. Pebez dudi memez tra e vo din beza er baradoz, rak gwelout a ran, aotrou St Per, e komzit brao ar brezoneg.

St Per (*souezet*). — Perak n'her grafen ket ?...

Cheun. — Feiz vat, aon em boa ne c'hallfec'h ket komz ouzin rak me, gouzout a rit, n'ouzon tamm galleg na tamm latin ebet.

St Per (*o c'hoarzin*). — Eur pezh kaer avat ! Te a gav dit eo ret gouzout galleg pe latin evit mont d'ar baradoz ?... Amañ, Cheun, e vez komzet holl yezou ar bed. Hag eun tachad a zo, ne glevan, koulz lavaret nemet brezoneg er baradoz... Hag an neñvou o tregerni gant toniou ha soniou Breiz-Izel !

(*Eus a bell e klevet eur vouez o kana « Bannielou Lambaol ».*)

St Per. — Klev, n'anavezet ket ar son-mañ ?

AR VOUEZ o kana kreñvoc'h :

M'em eus bet plijadur e Lambaol a wechou,

Oc'h ober tro an iliz gant an holl bannielou...

Jo po po po... etc.

Cheun. — O « non-dé-vingt-deux ». Met mouez Laou Kerc'houtell eo, maro bloaz a zo da hanter-eost diweza ?

St Per. — Ya, Laou Kerc'houtell eo.

(*Klevet a raer kantik ar Folgoat kanet gant eur mor a dud.*)

Cheun. — O trible !... Arabad pec'hi amañ avat. (*Cheun a selaou, hag a ra sin ar groaz, chom a ra en e sav, gant doujans, evel me vefe o sellet ouz eur brosesion o tremen*) :

Kaout a ra din beza er Folgoat... Eur Vreiz all eo ar baradoz Aotrou Sant Per ! Mat, me n' em gavo amañ ker brao hag er gêr.

St Per. — O ya, 'ta, hag eun tammig bravoc'h ivez !

Cheun. — Ha da vihanañ, ne vezin ket tregaset (pe trechalet) ken gant ar Gornandoned.

St Per (*souezet*). — Petra lavarez ? Ano 'zo ganez eus Kornandoned ?

Cheun. — Ya, abostol santel. Bez ez eus c'hoaz anezo e Breiz-Izel.

St Per (*diskredik*). — Alo, Cheun, kaoziou, kaoziou !!!

Cheun. — Eo, gwir-bater eo. Va mamm-goz, Doue r'he fardono... er baradoz emañ ivez ?

St Per. — Ya, sur.

Cheun. — Mat... Va mamm-goz eta, am boa klevet o lavaret meur a wech ne veze gwelet er vro na paotred ar sabad, na kornandoned abaoe ma vez kanet ar Gredo en oferenn-bred.

St Per. — En hent-se e tlefe beza sur.

Cheun. — Mat, Sant Per benniget, me 'm eus gwelet kornandoned e traoñ Menez-Are, e kichen chapel Sant-Kadou, war dreujou ar chapel zoken, ha Sant Kadou ne rae ket eur vann o welout anezo, e giz pa vije bet a du ganto.

St Per (*a hej e ziskoaz, diskredik*).

Cheun. — Fei, ker gwir eo ha ma 'z eus pemp biz ouz va dourn, ha ma ne lavaran ket ar wirionez, e c'houlennan beza rostet en ifern.

St Per. — Diwall, va faotr, eus ar pezh a lavarez aze...

Cheun (*gant nerz*). — Ya, ya, e c'houlennan beza rostet en ifern ma lavaran gaou !

St Per (*o sevel e zivrec'h*). — O ! O ! Met spontus eo neuze ! Kornandoned war dreuzou chapel eur sant ?...

Cheun (*a hej e benn*). — Ya, avat re wir eo abostol santel.

St Per. — Biskoaz kement all... Gortoz Cheun, ma welin e pelec'h emañ an dra-se.

(*Kemer a ra e lunedenn hir, hag e sell wardu an douar*) :

Te lavar, n'eo ket 'ta, e traoñ Menez-Are ? Chapel Sant-Kadou.

Cheun. — Ya, Aotrou Sant Per, tost da Venez Sant-Mikael Vrasparz.

St Per (*a gendalc'h da sellout gant e lunedenn warzu an douar*). — A, a... gwelout a ran, gwelout a ran. Eur chapelig koant du-se, e touez ar brug, en eul lec'h dudius... Sant Kadou a zo sioul a-walc'h en e lochenn... Met... O ! o ! o ! o !... Petra eo an diaoulou bihan-se a welan a greiz holl o tifoupa dirak ar chapel ?... A, a, a, a...

Cheun (*o sellout gant al lunedenn d'e dro*). — Ar gornandoned, na petra ta ?

St Per. — Aotrou Mikael, sellit me ho ped !

St Mikael (*o sellout d'e dro*). — Ya, Kornandoned endro da chapel Gadou.

St Per. — Hag hennez a zo a du ganto n'eo ket 'ta ?... Mantrus ! mantrus ! Eur vez eo !... Sot magn eo ar paotr.

(*Da Cheun*) : Kae atao, Cheun, e Palez an Dreinded !

(*Cheun a ya er baradoz. Klevet a raer c'hoari kantik ar Baradoz.*)

Goude m'eo aet Cheun er baradoz, St Per a lavar da St MIKAEL :

— Ha bremañ, Mikael, diskennit ganin war douar Breiz-Izel, pegwir ec'h anavezit ar vro, ma 'z in da lavarout e hegement da Gadou, rak eur vez eo gwelout eur sant o lezel kornandoned da ober ebatou noz, ha c'hoariou iskis dirak e chapel.

(*Diskenn a reont o daou, eus an tu dehou d'al leur c'hoari, hag e chomont kuzet d'an traoñ da c'hortoz.*)

Eil taolenn

HANTER NOZ, a son... Hag ar ouel a sav goustadik, war lanneg Sant Kadou. Sant Kadou a weler en e lochenn a-us dor e chapel. Ne finv ket. Ar bugel noz a ren ebatou ar Gornandoned, o seni gant eur biniou... Koroll ar JABADAO a zo ganto.

Sant Kadou a heul an dans en eur heja e benn. Laouen e seblant beza. Goude eur pennadig, MIKAEL a ra eul lamm war ar leurenn, e gleze gantañ. Strafulhet, ar gornandoned a dec'h en eur youc'hal...

Warlerc'h Sant Mikael, Sant Per a zegouez.

St Per da Vikael. — Tec'het int ?

St Mikael o sellet en dro d'ezañ. — Ne chom hini ebet ken.

St Per o sellout ouz Sant Kadou. — A ! A !...

St Kadou oc'h anaout Sant Mikael. — Sell ta piou ? Te eo Mikael. Ne deuez ket alies d'am gwelout daoust d'it da veza amezeg d'in. Mat a rez kas ar gornandoned daonet-se diwar va zro !

St Per rok. — Asa, oc'h ober goap emañ 'm eus aon.

St Kadou e unan. — Petra ?

St Per. — Lavar d'in 'ta war eün, rak n'am eus ket amzer da goll ha fresk eo an noz (*strevial a ra*) penaos ha perak e vez aze bem noz an diaoulou bihan hon eus gwelet bremaik, o tañsal hag o c'hoari bilibantik, eur youc'h ganto gouest da vouzara tud.

St Kadou. — Petra c'hoari gant hemañ. Pep ki a zo mestr en e di, emichañs.

St Per. — O ! O !... Evelse eo e komzez ouz Porzier ar Baradoz ?

St Kadou a chom berr.

St Per (*kreñvoc'h*). — Ya, klevet az peus ? Ouz Porzier ar Baradoz ! An Aotrou Sant Per, abostol Hor Zalver.

St Kadou buan. — Ra vezoc'h benniget, Aotrou Sant Per.

St Per. Dale'h da vennoz ganez, ha klev (*o tispaka eur paper hirr, hag o lenn*). — En ano an Doue teir gwech santel, Ni Per, abostol ha Porzier ar Baradoz, Ha Mikael arc'hael, dre eun nozvez kaer steredennet, hon eus gwelet en eul lanneg dirak chapel Sant-Kadou, e Breiz-Izel, sperejou daonet oc'h ober c'hoariou iskis. En eur youc'hal e tansent en enor da Sant Kadou, hag hemañ a oa a du ganto, hag a gemere perz en o ebatou noz. Gwir eo pe ne deo ?

St Kadou (*gant eun huanadenn*). — Re wir eo siouaz !

St Per. — Perak out aet da c'houzanñv traou evelse ?

St Kadou. — Ma ouesfec'h abostol santel... Setu amañ perak : Tri c'hant vloaz 'zo dre eun nozvez zu hag arneok, e teuas din dreist trouz an avel pennfollet eun trouz-all, kreñvoc'h ha skiltrusoc'h c'hoaz, heñvel ouz eur glemmadenn spontus, hag en-dro d'in e welen o koueza war al lanneg eur bern diaoulou bihan. Hag e youc'hent a bouez penn :

— « Ni eo ar gornandoned diweza. Kaset e vezomp kuit eus pep lec'h, zoken eus a Vreiz elec'h m'omp bet ganet. Breur, lez ac'hanomp da veva amañ en da gichen. Kemer truez ouz ar Gornandoned geiz.

St Per. — Ha truez az peus bet outo, evel just ?

St Kadou. — Feiz nann avat ! Me a savas prim va baz abad ha ganti e raen en aer sin'ar groaz o youc'hal a bouez penn : — « It kuit sperejou daonet, en ano hor Zalver it kuit ». Ha raktal an diaoulou bihan a dec'has evel skubet gant eur barr avel.

St Per. — Te 'lavar e oant aet kuit ? Penaos 'ta e oant aze bremaik... ?

St Kadou. — An dra-mañ a zo eun abadenn all, aotrou Sant Per. Kant vloaz goude, e kreiz an dispac'h gall a reas kalz a zroug d'hor Breiz ha da servijerien an Aotrou Doue, e voen diskaret gant ar re C'hlaz ha stlapet ganto en eur foz. Bloñset e oan ha gwall vac'hagnet.

St Per. — Pell emañ Yann diouz e gazeg. Alo, hast afo !

St Kadou. — Me 'lavar d'eoc'h ne oan ket war va zu eno. Ne raen nemet hirvoudi warlerc'h va chapel, ar menez a garien kement hag an dud vat a deue d'am fedi... An noz a deuas eta, eun noz kaer ha dudius... Bolz an neñv a oa steredennet evel eur parkad balan goloet e vleuñ melen. Ya, en neñv ar stered a skede, a skede... hag an noz...

St Per (*o trouc'ha warnañ*). — Ast afo, n'oun ket deuet amañ da selaou rimadellou eur barz.

St Kadou. — E oan o ouela, glac'haret bras, pa glevis wardro hanternoz eun trouz heñvel ouz an hini am boa klevet daou c'hant vloaz araok. An oabl a deuas da deñvalaat hag e klevis mouezioù iskis o yudal hag o viaoual... Ar gornandoned eo a oa o tont. Deuet e oant d'am c'hichen. Lamm, nijal a raent en-dro d'in. Neuze e teuas d'in eur menoz. Klevet em boa ar re goz o lavarout n'eo ket ar Gornandoned ken drouk-se ; va mamm goz zoken he devoa kontet d'in an troiou-kamm, o devoa graet, meur a wech, evit ober vat d'an dud keiz.

St Per. — Pebez ranell !

St Kadou. — Ha me da c'hervel ar Gornandoned.

St Per. — Penaos hoc'h eus gallet c'houi, eur sant, gervel kornandoned war ho tro ?

St Kadou. — Ya, sur. O va Zalver benniget. Koueza a rejont warnoun evel eur barrad arnev. Krena a ran c'hoaz pa sonjan.

St Per. — Difre, difre ! Lez an troidellou hag an digareziou.

St Kadou. — Aon am boa ha ne ouien ket petra da ober. C'hoaz ma vije bet va baz ganen. Met siouaz unan anezo a sellas ouzin hag a hopas :

Sant Kadou eo. A, a a... Hag an toullad traou hudur da yudal eveltañ : Sant Kadou eo... Hag e lamment evel diaoulou.

— Ya sur, a lavaren d'ezo, me eo Sant Kadou, kornandoned keiz... Mar karfec'h va c'has en dro d'am chapel e traoñ Menez Are, n'ho pefe ket a geuz.

— Petra roi d'eomp, emezo ?

— Feiz me a bedo Doue evidoc'h.

Hag ar Gornandoned da ober goap ouzin en eur c'houlenn : Lezel a ri ac'hanomp da veva el lanneg en da gichen ?

— Gouzout a rit ervat kornandoned keiz, n'oun ket evit rei an aotre-se deoc'h.

— Ha nan ? a respontas ar Bugel-noz. Ha kerkent e voen dibradet war bouez o skilfou uhel uhel en aer. Degouezet e oan etre ar Menezioù du, eleac'h ma 'z eus eun toull don a vez graet toull an diaoul anezañ. Den ebet ne dremen morse ebioù hap ober sin ar groaz.

St Per. — Hasta founnus.

St Kadou. — Mat, a zioc'h an toull-se e voen kaset ganto, hag ar re-se gane a bouez penn :

Jibidi, jibida,
E toull an diaoul ez i, i...
Jibidi, jibida,
E toull an diaoul ez a ;
Jibidi, jibida...

Ken trubuilhet e oan ma ne ouien ket petra raen. Ne ouien ket zoken petra lavaren.

St Per. — Gwelout a ran !

St Kadou. — Va Doue, aotrou Sant Per, me, me me... a gav din em boa prometet d'ezo ar pez a c'houlennent.

St Per. — Penaos hoc'h eus kredet...

St Kadou. — Ya, e vijent lezet ganin da zont amañ da ober o ebatou noz, war lanneg va chapel.

St Per. — Mantrus, mezus eo !

St Kadou. — Ya kredi a ran awalc'h, met petra reot ? Lavaraout a ran deoc'h ne ouien ket petra raen...

St Per a zell outañ hep lavarout ger.

St Kadou a hast da lavarout. — Manket oun bet, gwir eo, keuz am eus... Petra fell d'eoc'h, graet eo an taol...

St Per. — A, graet eo an taol. Evelse eo e tegemerit an traou, aotrou Kadou ? Mat ! Me a lavar deoc'h eo fall fall ho stad, ha pa ouezo an Aotrou Doue ho storfed, ne c'hoarzot ket kement marteze. Penaos, eur Sant, eur Sant Breizat ma plij', o kemer dindan e ser krouadurien diaoulek, ha mont betek rei d'ezo e vennoz ! Mantrus ! Ret eo beza e Breiz evit gwelout seurt traou.

St Kadou. — O, o... Penaos, abostol santel, e kredit va zammall evelse, me eur sant breizat hag en deus graet kement evit an Aotrou Krist war zouar Breiz, bro goz ma zadou ?

St Per. — En eur c'hoari gant kornandoned, krouadurien Paul Gornok ? Setu aze eun abostolerez avat.

St Kadou. — Abostol santel en an' Doue.

St Per. — En an' Doue, ya tavit, ha grit ho mea culpa, ha diskennit don enno'h hoc'h unan. Gouelit war ho pec'hed bras. Gant ho taelou, gwalc'h-hit hoc'h ene stlabezet gant ar Gornandoned.

(A greiz holl e klevet kan ar c'hilhog. Al leurenn a sklera tamm ha tamm ivez...)

St Per a zav e benn. — Tarz an deiz. Poent eo deomp distrei d'ar Baradoz. Alo, Kadou, lavarit ho mea culpa, ma ne fell ket deoc'h beza lamet eus reñk ar Sent, ha skubet eus Rouantelezh An Nefiv, in vitam eternam...

(Ar c'hilhog a gan eun eil gwech. Sant Per a jom a-zav... Sellout a ra a gorn ouz Sant Kadou. Cheun a zegouez.)

St Per da Cheun. — O, la. Piou en deus roet an aotre d'it da ziskenn evelse eus ar Baradoz ?

Cheun. — Aotrou Sant Per, lezet ho poa digor an nor-dal, ha deuet oun da zifenn Sant Kadou baour...

(Ar c'hilhog a gan eun trede gwech.)

Cheun. — He, Aotrou Sant Per, ar c'hilhog-se ne zegas ket sonj d'eoc'h eus eun dra bennak ?... Resped d'eoc'h, ha n'oc'h ket bet c'houi, eun dervez, gwall gablus en eur nac'h teir gwech ho Mestr an Aotrou Krist meulet ra vezo ? Ha koulskoude eo bet pardonet deoc'h... Rak-se 'ta ne welan ket perak Sant Kadou ha n'eo ket ken bras e bec'hed evelato...

Sant PER a zo nec'het da genta, skraba a ra e benn... Goudeze e vouse'hoarz.

St Per. — Mat... mat... Kadou an an' Doue teir gwec'h santel e-roan dit an absolvenn... ha va bennoz. Kenavo.

St Kadou a jom mut.

St Per. — Mouzet out ?

St Kadou. — Nann, nann... piket eo va c'halon. Mil bennoz Doue d'it Cheun gaez. Ha bremañ son d'in an Anjelus eur wec'h c'hoaz araok distrei e gloar ar Baradoz...

(Cheun a zon an Anjelus, paed ma sklera al leunren : ar mintin eo...

Klevet a raer al labouzed o richana...)

An OUEL a gouez.

ECHU.

ALIOU evit c'hoari KORNANDONED ST KADOU

AR C'HOARIERIEN

St PER a zo gwisket gant eur sae c'hlas steredennet pe alaouret. Eun alc'houez bras alaouret a zo stag gant eur chaden, ouz e c'houriz. An alc'houez-se a c'hell beza graet gant koad (contreplaqué). E leuz a zo bras, eur golo ruz d'ezañ. Al lunedenn hir (longue vue) a zo stumm hini eur martolod. E kartofis eo graet, ha livet e du.

St MIKAEL. Arabad da genta, lakaat eur plac'h yaouank da c'hoari ar rol-se. Eur fazi e vefe. Ret eo kemer eur paotr, stummet kaer. N'eo ket ret lakaat diou-askell d'ezañ. E wis-kamant a vo hini eur brezelour eus ar C'hrcnn-amzer, ma karer. E valansou a vo bras awalc'h, alaouret.

St KADOU. Evit rei d'ezañ stumm eun delwen (skeudenn) lakaat war dremm ar c'hoarier eur maskl, evel ar re a gaver meurlajez. Met arabad e vefe re fentus, koulskoude. War e benn eur pennigab. Eur sae vanac'h d'ezañ.

AR GORNANDONED. A vo gwisket e ruz, pe en eul liou all. N'eus fors. Dibab bugale vihan. Lakaat d'ezo pep a vaskl ivez, ar pez a vo fentusoc'h.

CHEUN. Gwisket eo e giz Landivizio. (Julod.)

KLINKADURIU (Décors).

Ar re-mañ a vo ordinal. An doalenn genta : War dreujou ar baradoz, a vo c'hoarier war ar rakleurenn (avant scène) dirak ar lien. Lakaat da St Per eur gador vrec'h a c'hiz koz.

Echu an doalenn genta, al lien a zav raktal dirak lanneg chapel St Kadou. Bez e vo gallet implij amañ kinkladur « ar c'hoad » a vez e pep c'hoariva. Ar chapel, ne vo gwelet nemet eul lodenn anezl : hini an nor gant delwenn St Kadou a-zloc'h.

KLEMMOU YANNIG KAEZ

Tud vat, klevit eur pennadig

Trubuilhou ar paourkaez Yannig !

Me n'on ket (1) eur pabor ! Me n'on ket mestr an dud —
Me n'ouzon ket kas ar c'hog hag ar yer d'o c'hud !

Eur paourkaez den ez oun, laket war an douar

Da gaout e-leiz va c'halonig poan ha glac'har,

Da veza gwall-gaset,

Boufonet, dotuet (2)

Ha blofiset !

Ha, laket

E reñk ar c'hi

E-barz an ti !

✱

Ganet ez oun bet, abaoe 'z eus pell !

E parrez Plouvreiz, koumanant kerdrell,

Eur sadornvez d'an noz

E-barz eur gwele kloz !

— « Sofij mat am eus eus kement-se,

A lavare va mamm din-me,

Rak oc'h ober krampouez e oan

Evit an devezour d'e goan !

A-vec'h em boa gallet peurleda ar grazenn (3)

Ma voe ranket kerc'hat dioustu gwrac'h-an-holen ! (4)

Ma ! D'anzav ouzoc'h ar wirionez,

N'em eus tamm soñj eus an dra-se !

Eus Mamm avat

Em eus soñj mat !

Hir e oa 'vel Aviel sul ar Beuz,

En he fenn daoulagad pikous a-dreuz,

Brizennou hag eun tronkon (5) fri ruz-teo

Kamm ha kromm evel fri ar Boudedeo !

Eus Mamm, ya 'vat,

Em eus soñj mat :

Merk he divrec'h hir ha kreffiv

A zo c'hoaz war va fenn a-dreffiv !

✱

Na poa oan bugel

E-barz va c'havell

'Teue alies komerezed,

Koz klakennou, rac'hoanerezed,

Da sellout ouz ar pouponig

O chutal (6) sioul e veudig,

Tra ma vezent-i o c'hortoz gant mall,

Eur bannac'h (banne) kafe pe eur bannac'h all !

Met pa grogen-me da wic'hal :

« Peoc'h 'ta, emezo, loen segal !

Nen out ket echu da vlejal ?

Gwell e ve dit bremañ tevel :

(1) — Ne down ket : n'oun ket.

(2) — Dotuet : kannet.

(3) — Ar grazenn : ar grampouezenn diweza.

(4) — Gwrac'h-an-holen : amlegez.

(5) — Tronkon : mell, pikol.

(6) — Chutal : Suna.

N'eo ket brao kana ken uhel
 Pan (7) eo bet beuzet da dad naturel
 En deiz all e stank ar vilin-avel ! »
 Nann, pa lavaran d'eo'h, me n'on ket mestr an dud
 Hag n'ouzon ket kas ar c'hog hag ar yer d'o c'hud !

Diwezatoc'h evel an holl
 Ez oun-me bet kaset d'ar skol
 Da zeski gant an Aotrou Foll
 En doa kelennet va breur Pol.
 Kaer 'voe, siouaz, skei war va fenn,
 Diskouez kant gwech pep lizerenn,
 War ar paper me ne welen,
 Trec'h ha traof ha penn-da-benn,
 'Met du ha gwenn
 Ha plas da lenn !
 Setu ma 'z oun chomet azen,
 Azen a-grenn !

Soudard oun bet kenkoulz ha c'houi
 E-pad daou vloaz, er marchosi,
 O skrivellat, ya, koz-kezeg
 Na gomprenent nemet galleg !
 C'hoaz e lâre ar c'habiten
 En eur sacha war e varvenn...
 « Lezit hemañ gant al loened
 E-pad ar bloavez war e hed !
 Rak e kêr e vefe fall
 Gwelout o vont eun amparfal
 N'eo ket 'vit anaout korporal
 Diouz fakteur pe goronal !
 Ha neuze, biskoaz kement-all
 Er marchosi 'vankfe eun aneval ! »

Eun devez miz Here, koulskoude,
 Echu va servij ganin-me,
 A-benn ar fin, fidadoùle,
 E tapis tee'hout ac'hane (8)
 Ha me d'ar gêr war an ton bras
 Da adkemer er vro va flas.

Met eno.... sot ez an
 Pa soñjan
 Pegen doun em lagad em eus boutet va biz !
 Ret e oa d'in kaout eul lodenn e park ar Briz (9)

Pa zimezis
 Da Juli Sis !
 Juli ne chom ket d'ober tiekou (10)
 Na da glask rei d'in-me pokou.
 Va gwreg a zo diou wech kement ha me !
 Kof ha kein he deus, allas ! Va Doue !
 Bez 'he deus chouk ha goug ha baro !
 Ha krefiv eo 'vel eur c'hole-taro !
 He dorn ledan 'vel dorn eur paotr,

Kof he gar e-giz eur ribot !
 He zreid a-dreuz en he botou
 Hag he daoulagad luch o-daou.
 He diousskouarn sec'h-kras-melen
 'Zo heñvel ouz diou grampouezenn !
 Ma ! Pa c'hoari va berjelen
 Gant ar vaz-yod pe an troad-skubelen
 Ne vezan ket, fedamdoustek !
 Gouest da lârou « Chaous ! » 'vit eur gweneg.
 « Chê ! kof-krank, treid-paun, emezi,
 Ha senti a ri pe ne ri ?
 Alo ! ouichidrou (11) fri-mic'hi !
 Paneogwir ez oun mestr en ti.
 Alo 'ta, oust ! Ouichidrou berr (11),
 Kerc'h din ar saoud dioustu d'ar gêr ! ».

Hounnez, ya ! a oar an tu mat
 Da lakaat Yann da labourat,
 Da heilhat patatez, da skuba 'n ti
 Ha da gerc'hat d'ezi he butun-fri !
 Ha ret senti
 Hep lugudi !
 War ar manerou (12) 'vezan-me
 Kouls lavarout : bemde-bemde !
 Nann, pa lavaran d'eo'h, me n'on ket mestr an dud
 Ha n'ouzon ket kas ar c'hog hag ar yer d'o c'hud !

Hag evelkent, tudou,
 Pan oc'h kamaradou,
 Hen anzav a rin ouzoc'h-c'hwi ?
 Sot-Nai ec'h oun bet gant Juli !
 ...Zoken, pa 'n em soñjan ervat
 E kav d'in he c'haran dalc'hmat.
 Met perak ez eo ken bras all
 Ha me eun tamm skribiton (13) fall ?
 M'am befe nerz kement ha hi
 Ne rankfen ket plega d'ezi !

Eun dra, eun dra... penaos e reer
 Eus an dra-se e-barz e kêr ?...
 A laka ennoun-me trubuilh !
 Eur c'helou eo hag am strauilh,
 Eur c'helou am lak nec'het-mik,
 Eur c'helou 'ra d'am c'halonig
 Lamm a-gleiz, a-zehou hag a-bik...
 Hepdale... e vezin tadig !
 Hepdale hor bo eur bugel :
 Eun dra eo a zo naturel,
 Met plou a lavaro d'in-me
 Da biou e taolo 'r bugel-se ?
 Ouz plou e vo heñvel hennez ?
 Ouz e vamm pe ouz e dad kaez ?

(7) — Pan : pa'z.

(8) — Ac'hane : ac'hano.

(9) — Kaout eul lodenn e park ar Briz : e bro-dreger, beza sot.

(10) — Tiekou : ardou (distagit : tyekou).

(11) — Ouichidrou
 Ouichidrou berr } gerioù a vó-Dreger de lakaat ar c'hezeg da drel a-zehou.

(12) — Maneuron : labourioù an ti (unander : maneur).

(13) — Skribiton : denig frammet-dister.

Ô sant Chokola venniget !
 Aiou ! pébez poan-spered !...
 Gwell eo d'in mont bremañ d'ar gêr :
 An amzer eno a gavin berr.
 Kement a labour hag em eus,
 Ne vin ket etre reuz ha keuz.
 Va fenn bremañ ouzin a faout !...
 Poent eo d'ifi mont da c'horor saoud.
 Nann, pa lavaran d'eoc'h, me n'on ket mestr an dud
 Ha n'ouzon ket kas ar c'hog hag ar yer d'o c'hud !

**

Neuze, tud vat hoc'h eus klevet va zrubuilhou,
 Soñjit eta ennoun en hoc'h holl bedennou !
 Kenavo ha mil bennoz ar beuz
 Da goueza, stank-stank, war ar pezh hoc'h eus !

Jakez Konan.
 (1-9-46)

Katellig, Mari-Jan ha Cheunig

Kontadenn savet e Plougastel gant Madalen Laurent ha
 Mari Perez, priz kenta « Abadenn al levez » ha *Bleun-Brug* Keranna 1951.

Mari-Jan. — Sell 'ta, Katellig !

Katellig. — O saperdistak, Mari-Jan eo !

M. — Ya, me sur, ha kontant da welout ac'hanout !

K. — Abaoue an amzer ! Pa oamp hon diou o tiouall ar zaout e ti Jakez fritougn Tost tri-ugent vloaz 'zo. Petra out deut da veza abaoe ?

M. — Feiz, dimezet oun bet, evel just.

K. — A ya, gant piou ?

M. — Gant Cheun Fariotez !

K. — O saperdistak ! Gant Cheunig Fariotez ! An hini 'm'eus bet anavezet ? An inosant bihan a yoa e zaoulagad o c'hoari koukou en eil gant egile ? An hini 'oamp boazet da grial warnañ : « Cheunig Fariotez ! Cheunig Fariotez a laka daou droad er memez botez ! »

M. — Ya, hennez eo. N'eo ket pinvidik avat, pegwir eo, eur paour kaez devez-our o chom en eun ti plouz. Lavaret oa d'eomp, pa oamp yaouank, ober daou wenneg gant unan. Ma ! Katellig, kaeroc'h eget se hon eus graet, pegwir omp bet en devez all o prena eur « Armoar a glass »...

K. — Eun armoar a glass ?

M. — Met, eun armoar a glass hon eus graet daou dioutañ !

K. — Met kont d'in da genta penaos out bet dimezet gant Cheun. (Kana a ra : « Cheunig Fariotez, Cheunig Fariotez, a lak daou droad er memez botez ! »)

M. — Ma, setu amañ an taol. Eun tamm douar a oa gant va zud, he setu ma oa deuet Cheunig du-mañ da goumanant eost, tri-ugent lur evit tri miz.

K. — O saperdistak ! Tri-ugent lur hepken ?

M. — D'ar mare-ze e oa kalz. Met, pa oa echu an eost, gwerzet al lin hag an ed, e oa c'hoaz da baea gouel Mikeal, ha meur a dra all, ha ne oa ket chomet archant awalc'h da baea Cheunig. Hag heñ da lavarout e oa o vont da gas va zud dirag ar « Juge de paix », ar pezh a lakas anezo gwall nec'het. Diou goz bioc'h o oa dumañ, prenet da zadorn ar merzer bihan, ha va zad da lavaret d'ezañ : « Ma kerez, da vihana, ez pezo ar vioc'h

goz evit da goumanant eost ! » — « Eur vioc'h goz, eme Cheunig. Petra rin-me ganti ! Roit d'in kentoc'h ho merc'h Mari-Jan ! »

K. — O saperdistak ! hag e voe graet ar marc'had ?

M. — O, pas dioustu ! : « Pez divergont, a lavaras va mamm, va merc'h Mari-Janig a dalvez muioc'h eget tri-ugent lur ! — Ya, eme va zad, ne roin ket anezi evelkent evit tri miz koumanant eost. Met, ma karez lavaret d'in e teui e koumanant adarre er bloaz a zeu, ez pezo anezi ! »

K. — Hag eo bet deuet Cheun evit en eil bloaz ?

M. — Ya sur, ha lorc'h ennañ ! Eur plac'hig vrac' oan-me-me d'ar poent-se, ha va Cheunig na oa ket fached d'am gounit !

K. — Hag oc'h bet dimezet goude ?

M. — Ya. Ne blijte ket re Cheunig d'in, dre m'en doa eur fri hir ha kamm evel hini eur perroket, met n'heller ket nac'h ar goumanant eost ouz eun den, p'eo graet al labour, ha pa n'o devoa ket va zud arc'hant awalc'h, e oa ret d'in paea o dle gant eur seurt bennak.

K. — Paour kaez Mari-Jan ! N'out ket bet re valeürus da vihana ?

M. — O nann ! Cheunig n'eo ket eur gwall baotr. Sell, n'eus bet nemet eun dra, epad hon amzer, beteg-hen, o lakaat trabaz etrezomp. Ne oamp ket pinvidik, ha ne oa en ti nemet eun tamm koz mellezour bihan ha teñval. Ha d'ar zul vintin, pa veze ar poent da vont d'an oferen, e vijemp oc'h esa kaout anezañ assambles : me, evit lakaat va c'hoef, hag heñ evit troc'ha e varo. Ha c'hoaz, ar paour-kêz den, ne c'helle ket hen ober mat morse. Rak ken bihan oa ar mellezour ma oa leuniet gant e fri perroket, ha kaer en doa falc'hat tro war dro, e chome ato eun takad benag dizofijet gant ar falc'her. Eur zulvez teñval, e oamp o vont d'an oferen vintin, hag em boa lammet ar mellezour digantañ araok m'en doa echu d'en em ficha, ha pres warnañ, e tigouezas d'ezañ lakaat an tu adreñv eus e vragou en arôk, ha n'hen deus ket gouezet netra, ken na oa erru en iliz : ne gave ket e c'hodellou pa oa o klask e zaou wenneg da baea e gador.

K. — O saperdistak ! pebez c'hoarz sur awalc'h en iliz !

M. — A ya, hag en distro d'ar gêr, rag an deiz a oa deuet. Va Cheunig a yeas e kounnar ruz : « Ar jeu-mañ na bado ket, emezañ, ret eo prena eun « armoar a glass ». — « Ne vo ket, eme, unan a yelo d'an oferen-bred, eun all d'an oferen vintin, hag evelse e c'hellimp en em ficha bep eil gant ar memez mellezour. »

K. — Ha neuze ?

M. — An traou ne daent ket gwelloc'h. Pa z'ae Cheun d'an oferen vintin, e kave Per ha Paol, Jakez ha Glaoda ha me 'oar piou ? da vont gantañ da rifisa boutailhou en ostaleuri, ha pa ne oan ket aze da vroida anezañ gant troad va « farapluie » ar paotr en em gave diwezat er gêr, ruz e fri kamm ha tomm e benn, ha ne wele ket gwall skler da aoza lein. Eur wech memez, en eur zistrei eus an oferen-bred, me a gavas va Cheunig kousket ouz an daol, o roc'hal evel eun dousenn yleizi, ha netra war an tan !

K. — O saperdistak ! Neuze, sur-awalc'h, e klevas e begement ?

M. — M'hen asur d'it : N'emañ ket va zeod em godell. — « Asa eme, an dra-mañ ne c'hell ket padout. Ret a vo prena bep a vellezour, ma 'zaimp hon daou d'ar memez oferen. — N'eo ket, n'eo ket, eme Cheun, eun « armoar a glass » a vo prenet, pa lavaran. Ni a c'hello mont hon daou ebarz assambles d'en em ficha, ha ne vimp ket mui, e riskl, me da lakaat an tu adreñv eus va bragou en araok, te da lakaat da goef ken difeson ha bremañ. — Ya met, eme, e pelec'h e vo kavet eun « armoar a glass » da brena ? — Beñ, e Landerne ! — Ha penaos e vo kerc'het unan evelse amañ, pa n'hon eus na kar na kezeg ? Hag e soñj d'it emaeun-me o vont da zikour ac'hanout da zougen ar mekanig-se war eur c'hravaz eus Landerne beteg amañ ? »

K. — Ar rezon 'oa ganez, Mari-Jan. Ne vije bet den trist ebet e Plougastell.

Petra reas neuze Cheun ?

Kana 'ra : « Cheunig Fariotez, Cheunig Fariotez

A lak daou droad er memez botez ! »

- M. — Mont a reas da gaout hon amezog. Job al lonker, en doa eun azenn, Tutur e ano, hag eur wetur, evit goulenn o fresta epad eun devez ; ha ni en hent hon daou beteg Landerne. Pa oamp o tiskenn Kerjoly, Cheunig a welas eur skritell goad e kostez ar ru, merket warni « 20 km. à l'heure ». — « Sell 'ta, emezañ, ret eo ober ugent kilometr en eur evit treuzi kêr. » Hag hen da zevel en e zav er wetur, ha da lopa war an azenn, ha da gemer memez va « farapluie » da bigosat anezañ, d'ober d'ezañ mont buan ha buan, ha buanoc'h c'hoaz, ken ma ne stoke ket mui koulz lavaret ar rojou ouz an hent. — « O Santez Anna, emeve, deuit d'am zikour. » Ya, met, pa gendalc'he Cheunig da skei war an azenn beteg terri troad va « farapluie », ne oa na sant na santez evit ober d'ezañ mont goustatoc'h.
- K. — O saperdistak ! Pebez abadenn evidout. Hag e riskl c'hoarz da goueza er stêr, Mari-Jan gêz !
- M. — E-kichen ar pont e oa daou archer : — « Hep, hep, emezo, da belec'h emaoe'h o vont ken buan hag an dra-ze ? — Da breña eur « armoar a glass ». — Ha perak eo ret d'eoc'h daoulammet kement-se ? — Perak neuze, eme Cheunig, ez eus laket eur skritell aze merket warni ober ugent kilometr en eur ? — Ma n'ouzoc'h ket eo ar skritell-ze evit ar gweturiou-dre-dan, me ho tesko. « Subséquamment(diou amand : unan evit bafoui an azenn, eun all evit... evit... ha ya « excès de vitesse avec voiture à âne dans les rues de Landerneau ».
- K. — Pebez chañs evidoc'h c'hoaz n'o deus ket kaset ac'hanoc'h d'ar prizon, ha goude marteze, d'ar galeou !
- M. — Setu ni en em gavet war ar fin e ti an Ao. Hernot, e rue ar Feunteun-Wenn : — « Petra vank d'eoc'h, emezañ ? — Eun « armoar a glass », emezoun, da vont hon daou ebarz ! — Da vont ebarz ? N'am eus ket ar sort-se. Ne der ket ebarz ! — Hañ ? Da betra neuze d'ar banezenn-mañ lavaret d'in e c'helljemp mont ebarz hon daou da ober hon « toaletenn » ? — N'ho pezo nemet en em lakaat dirazi en ho sav, hag e c'hellloc'h en em facha ken brao ha daou zen a bemp bloaz warn' ugent ! »
- K. — O saperdistak ! Ken brao ha daou zen a bemp bloaz warn' ugent ! Pebez tra gaer memez tra, eun « armoar a glass » !
- M. — Setu anezañ karget er wetur, hag en hent !... — Siouaz, pa voemp e traoñ kreac'h Kerludu, an azenn Tutur, deuet soñj sur-awalc'h eus ar c'hefnad en doa bet en eur zont, a lakeas en e benn tremen hep bale. Kaer en doa Cheun lopa warnañ, bac'hata anezañ, kaer em boa-me, gant va mouez flourig, lavaret d'ezañ en e ziskouarn hir : « Allo Tutur, Tuturig, va chentil, bale 'ta ! », netra da ober !
- K. — Pebez abadenn, tud kêz ! Petra 'peus graet neuze ?
- M. — Me 'lavaras da Cheunig : « Red e vezo chench azenn war ar wetur, staga an hini a bevar droad ouz al lost, ha te, an hini a zaou droad, a yelo el limon ! »
- K. — (O c'hoarzin) Ah, ah, ah, ah... Chenchet Cheunig en eun azenn ! (Kana a ra) :

Cheunig Fariotez, Cheunig Fariotez

A lak daou droad er memez botez !

- M. — An azenn nevez el limon, ah traoù n'ez ejont tamm ebet gwelloc'h. Al loen pennok all, pa voe staget ouz lost ar wetur, ne rea nemet enebi ha chacha en adrefiv. Cheunig a lavaras neuze d'in : « Distag an azenn ac'halese, ha kerz war e gein d'ar gêr, ma karez, ha me a gaso ar wetur ganen. — Penaos, emeve, mont, me, Mari-Jan, war gein eun azenn ? C'hoant e peus ta, e vefe klevet betek kêr Vrest c'hoarzedennou Plou-gastelliz ouz va gwelet, ha ma tiredfe holl ganfarded hag holl chas ar

vro war va lerc'h ? Nann, lakeomp an azenn er wetur gant an « armoar a glass ». — Te a chacho, ha me a vounto war al lost ! »

- K. — An azenn Tutur a yoa faro da veza pourmenet evelse er wetur hag a soñje sur-awalc'h : Pep hini d'e dro !
- M. — N'ouzoun ket. Ar pezh a zo sur eo, pa voemp erru e beg kreac'h Kerludu, e oa hon teod hir er-maez eus hor genou. Goude, avat, war an diskenn hag ar plaen, e yeas an traoù gwelloc'h ganeomp. Met allas ! ar pep gwasa 'oa da dremen !
- K. — O saperdistak, petra c'hoaz, Mari-Jan geaz ?
- M. — Te 'oar, evit diskenn du-mañ, er porz, ez eus eun tamm kreac'h soun. Cheunig ne oa ket evit hantergulieri, hag a c'hopas warnoun : — « Mari-Jan, buan, buan, hast a-fo skolia ar rod, pe ez a ar wetur da drec'hi warnoun. » Allaz ! me ne gaven skoilh ebet. Va boest-vutun 'oa ganen em godell, me hel lakeas dirag ar rod : friket 'oa ken buan ha lavaret chou d'ar yar. Ha patatras : setu skampet ar wetur da draoñ ar porz, graet chibout ganti dreist Cheunig aet war e c'henou, ha tapet dindan ar pezh a oa ebarz !
- K. — Hag an azenn keaz ?
- M. — O, nebeut a zroug, troc'het e ziskouarn dre an hanter met hir awalc'h e chomint gantañ c'hoaz !
- K. — Ha Cheunig ?
- M. — Nebeutoc'h eget netra : tougnet gantañ e fri kamm, met re hir e chome c'hoaz !
- K. — Hag... hag... hag an « armoar a glass » ?
- M. — Faoutet dre an hanter ar mellezour bras a oa stag outañ... E daou damm !... Met n'eus droug ha na zerviche d'eur vad bennag. Evelse eo lakeat an tamm torret da Cheunig adreñv an nor, hag an tamm all a zo lakeat d'in er c'horn keuneud. Hag evelse, elec'h kaout eun « armoar a glass » etre-zomp hon daou, hon eus bremañ pep a hini.
- K. — Saperdistak, gwir eo, pebez chañs evidout, hag evit Cheunig !
(Ha, kazell-ha-kazell, ez eont kuit en eur gana :
« Cheunig Fariotez, Cheunig Fariotez
A laka daou droad er memez botez ! »)

M. Laurent ha M. Perez.

DIVINADENNOU

1. Breur ha c'hoar
O vont d'ar foar.
Unan a lavar gwir, egile ' lavar gaou,
Hag e lavaront ar memes tra o daou.
Petra eo ?
2. Petra ne velomp ket
Hag a bouez warnomp bepred ?
3. Petra ' ra eur yar en eur c'hoad
Pa ne bouez nemet war eun troad ?

ALIOU MAT :

- Neb ' zo laouen gant bara sec'h
A gav da beuri e pep lec'h.
- Gwell eo brud vat da bep hini
Eget madou leiz an ti.
- Nep ' zo re vignon d'ar gwin mat
'Zo enebour da vab e dad.
- Gwelloc'h karantez leiz an dourn
Eget aour melen leiz ar fourn.



SON AR GOUKOUG

Allegretto

Son nevez e dieu vouez

Pa gleo'r goukoug war he gwezenn: Kou, kou, kou, kou, kou, kou! Ja ne dig vi han
 a c'houlenn: Kou kou kou kou kou kou! Lavar d'in me labousig pegeit c'hoaz e vo
 ret gedalma ka vin eur pried daoust ha ne gavin hini 'bet, Kou kou kou kou kou kou!

1. Pa gleo 'r goukoug war he gwezenn :
 Koukou, koukou, koukou !
 Janedig vihan a c'houlenn :
 Koukou, koukou, koukou,
 Lavar d'in me, labousig pegeit c'hoaz
 E vo ret gedal ma kavin eur pried
 Daoust ha ne gavin hini 'bet
 Koukou, koukou, koukou.
2. Pa gleo 'r goukoug war he gwezenn
 Jan-Pierrig ivez 'zao e benn
 — Lavar d'in me labousig
 Daoust ha piou ar wella
 Eus merc'hed yaouank ar vro-mañ ?
 Daoust ha me ' jomo da goza ?
3. List ar goukoug da gana goap
 Rak n'eo ket d'hounnez eo dibab,
 Da bep hini eo gwelet
 Ha klask boutou d'e droad
 Arabat d'eomp ankounac'haat
 Pa zimezer eo evit mat.

« Paôtr-Treoure ».